

8N1-1-020

Cédens C.S.

VI

A uz d'hor penn, o Gwerc'hez,  
Ar goabren zo tenval,  
Kaïf, Pilat, Herodez  
O deuz c'hoaz breudeur fall ;  
Grit eur zell a drugarez,  
Hag ar goabren faouet,  
Ar sklerder zeo a nevez  
Gant an heol alaouret.

VII

Er Raz ar mor kounnaret  
Euz ar garrek a sko,  
Ar-roch n'eo ket dispennet,  
Stard mad a jommato  
Dirag kounnar an dud fall  
Ni jomm vel ar garrek,  
Rak c'hwi-a oar hon diwal,  
Chwi Mam hag ar beleg.

VIII

Skuillit var al labourer  
Vel var an den a vor,  
Ho pennoziou hep niver,  
Rouanez douz Arvor !  
Kennerzet gant ho skoazel,  
Holl, beteg ar maro,  
Bepred ni stourmo fidel  
'Vit Doue 'vit ar Vro !

IMPRIMATUR :

Quimper, le 10 Août 1921.

P. MESSAGER, Vicaire général.


Kemper, moulet e ti de Kerangal.



KANTIK  
Intron Varia Langroaz

(Mater Dolorosa)

Ton : Patronez douz ar Folgoat.



### DISKAN

Intron Varia Langroaz,  
Mamm garet hor Zalver,  
Holl d'ho chapelik bep bloaz  
Ni a zired seder,  
Da lakat e harz ho tron  
Hor poaniou, hon enkrez ;  
Da zigori hor c'halon  
D'ar Vamm a drugarez.

### I

E parrez Kleden, savet  
War bord eun draonien c'hlez,  
Ho chapelik ken karet  
Zo goloet a wez braz ;  
Savet eo bêt vit deski  
Da gristenien ar vro  
Ho klac'här, ho melkoni  
Dirag Jezuz maro.

### II

N'eur welet e holl boaniou,  
E c'hood, e gurunen,  
E gorf goloet a c'houlion  
Ganeoch war ho parlen ;  
An anken vel eur c'hlez  
Ho kalon a dreuzas.  
Biskoaz mam en e bué  
Kement a c'houzanvas !

### III

Abaoue naontek kantved,  
Poaniou ho map Jezuz  
Siwaz vez renevezet  
Dre ar pec'hed euzuz.  
An den a zo ken dister  
Ma teu d'ankounachat  
Ar boan a ra d'e Zalver  
Ha deoc'h, Gwerch'ez ken mad !

### IV

N'ho chapelik, o Gwerch'ez,  
N'eur welet ho klac'här  
Ni bromet gant karantez  
Ne vimp mui ken digar.  
Pardonit, o Mam dener,  
Ni zo ho pugale,  
Ha ! gounezit hor Barner ;  
Bezit ouzomp true !

### V

Intron Varia Langroaz,  
Hor Mamm garantezuz,  
Grit n'ankounac'himp biskoaz  
Pasion ho map Jezuz,  
Skrivit doue e bemp gouli  
E gweled hor spered,  
Grit ma vagimp kasoni  
Vit kement zo pec'hed.